



**Foar levrioù ar re yaouank Bro Montroulez – 28 & 29 a viz Du 2015  
Pol ar Roudour - Sant-Martin-war-ar-Maez**

**Reolennoù kenstrivadeg danevelloù evit ar vugale**

1. Aozet eo ar genstrivadeg-mañ gant ar gevredigezh *La Baie des Livres* ([www.labaiedeslivres.com](http://www.labaiedeslivres.com)) hag ar c'hevread *KLT* ([www.klt.bzh](http://www.klt.bzh)) hag e gevredigezhioù ezel.
2. Digor eo ar genstrivadeg d'an holl dud.
3. Danvez an danevelloù a rank bezañ da gentañ penn evit al lennerien-mañ : **bugale 9-14 vloaz.**
4. Ar skridoù a vo savet e brezhoneg peurunvan.
5. Ar skridoù a rank bezañ krouidigezhioù gwirion.
6. Ne vo kaset nemet un danevell dre genstriver.
7. Skriverezet e vo ar skrid.
8. Niver a arouezennoù en destenn : etre 15 000 ha 20 000 arouezenn d'ar muiañ hep kontañ an esaouennoù.
9. Tem : "**Nebaon !**"
10. N'hell ket izili ar juri kemer perzh er genstrivadeg.
11. 500 euro a vo roet d'an hini a yelo ar maout gantañ, 300 euro d'an eilvet ha 200 euro d'an trivet. Bez' e c'hell ar juri chom hep reiñ ar prizioù ha/pe reiñ prizioù kalonekaat.
12. Roet e vo ar prizioù da-geñver *Foar levrioù ar re yaouank Bro Montroulez* e Sant-Martin-war-ar-Maez d'ar Sadorn 28 a viz Du 2015. Bez' e ranko al loreidi bezañ e Sant-Martin-war-ar-Maez da resev ar prizioù.
13. Ar gwirioù war ar skrid a chom gant an aozer.
14. Embannet e vo an 3 danevell loreet e-barzh ar gelaouenn *Al Liamm*.
15. Ar skridoù a rank bezañ kaset da g/KLT **a-benn ar Gwener 06 a viz Du 2015** :  
KLT 41 Kae Bro Leon 29600 Montroulez pe [klt@wanadoo.fr](mailto:klt@wanadoo.fr). Titouroù ouzhpenn :  
02 98 63 98 79 – 06 82 77 10 10
16. Dre gemer perzh er genstrivadeg-mañ e tisklêr ar perzhiad asantiñ d'ar reolennoù ha da zivizoù ar juri.